

# GUERZ

VAR

## BREZEL AN TUNISI HAG AN ALJERI

VAR TON : *Va c'haloun a zo fraillet,  
pe eunn all.*

Me ho ped 'ta, soudardet, euz a bep seurt arme,  
Da zont da glevet brema kana eur verz neve,  
Zo savet d'an dud iaouank a ia d'an Aljeri, (1)  
Pe d'ober brezel siouaz ! ebarz en Tunisi !

Potret ar Gouarnamant a gass ar soudardet,  
'Vit ober brezel siouaz ! e bro an Arabet ;  
Eleac'h gant an dienez, an domder, ar skuisder,  
He varvont pell euz ho zud 'barz er brassa miser !

En Afrik hag e Tunis e veler ho vervel  
Gant ar sec'het. an dersienn, soudardet Breiz-Izel,  
Ha lod all lazet ive gant taul an enebour,  
Pa'z int bet casset dezho gant Republik traitour.

Mar z'eus brezel e Tunis, eo gras d'ar Republik,  
A so æt di da sicour tud da zont pinvidik !  
Da zicour marc'hadourien d'ober hentchou houarn,  
Enep c'hoant tud ar vro-se hag ar re he gouarn.

---

(1) *D'an nao varn-ugent a viz Meurs mil eiz kant pevar ugent, Gouarnamant ar Republic, enebour d'an urz vad ha da Zoue, enebour d'an oll Relijuset ha dreist peb re all d'ar Jesuistet, ha skrive evit kass kuit an oll Relijuset.*

*Eur bloas goude ma oa bet skrivet an Dekret-se evit kass tud honest, Relijuset santel euz ho ziez ha lakeat serra ho ilizou, eo en em zavet an Arabet enep ar Frans. Al lizer da gass ar Relijuset kuit, a oe skrivet d'an 29 a viz Meurs 1880, an Arabet a zo en em savet enep ar Frans d'an 30 a viz Meurs 1881. Daoust ha dorn Doue ne ma ket aze !*

Eur vrezel euz ar c'hriissa zo tennet var ar Frans  
Gant ar Republicanet, tud fall heb coustians,  
Dre ma'z int eat heb ezomm du-ze d'ann Tunisi,  
Ha losket d'en em zevel potret an Aljeri !

Ia ! gant ar Presidant hag an oll Vinistret, (1)  
Ar stad reuzeudik siouaz ! euz ar Frans zo karet,  
Dre ma hellont evelse, ober ho aotrounez  
E palesiou alaouret, pell euz al lazerez !

Dansal a reont ha bragal, eva, ober cher vad,  
Epad ma ar Fransisien pell du-ze er gombat,  
Pell du-ze ho combatti ebarz en Tunisi,  
Pe ho vervel en Aljer dre faot Albert Grevy !

Mar m'omp hirio e brezel siouas ! barz en Afrik,  
N'euz den kaoz a gement-se, 'met tud ar Republik,  
Ho deuz great eur Gouarner d'euz breur ar Presidant,  
Evit ober tro dezhan da c'hounit fors arc'hant !

---

(1) Gouzout a rit penaoz Gouarnamant ar Republik en devoa  
great eur gouel bras d'ar 14 a viz Gouere 1881, dispignet cals  
arc'hant evit enori an dud koz-se euz Paris ho devoa deveit calsic  
traou, lazet aleiz a dud. Mad, gouel ar Republik a zo great evit  
kaout sonj euz an dervez divalo-se !

Bretonet, daoust a na vije ket bet guelloc'h miret an arc'hant-  
se evid rei bouet da zrebi d'ar Reservistet a zo ken poanuis  
ho doare. Reservistet Kemper a oe lezet hep tam pe kouls lavaret  
heb tam en dervezma oant en em gavel !

An oll dud a lavar, e varv hor soudardet paour, du-ze ebarz  
en Tunisi hag en Aljeri, gant an domder, an tersiennou o bep  
seurt, gant ar sec'het, an naon, en eur ger, e c'houzanvout eno  
an dienez a peb tra ! Pa vezont klanv, n'euz ket a louzeier zoken  
da rei dezho ! Kredi a ran e lavarer ar virionez, rak o velet  
lezel tud hag a zo c'hoas er gear heb tam eun devez pen-da-ben,  
eo anat d'an oll eo goassoc'h c'hoaz ebarz ar broiou-se. Setu aze  
al liberte roet gant ar Republik !

Setu aze ar peoc'h ! Ia, ar Republicanet ho deuz tromplet ar  
Frans, rak int ho devoa lavaret ne vije ket bet a vrezel gant ar  
Republik ; ha koulscoude emaint da vad oc'h ober brezel ebarz  
en Tunisi hag en Aljeri ! Guelit ar Republicanet a voar lavaret  
gevier evit paka moueziou !

Selaouit c'hoaz, paizantet, ar Republicanet,  
Ha guelit penaoz siouaz ! gantho oc'h bet tromplet,  
Rak int ho doa lavaret ne vije mui brezel,  
En dra vije bet skrivet Republik er baniel !

Kouskoude hon deuz brezel hag eo meurbet skrijus,  
Ha stad soudardet ar Frans a zo enghi poanius,  
Pa ze guir renkont mervel heb kaout dour da eva,  
Pe lazet gant n'Arabet, tud demeuz ar c'hriusa !

Breur ar Presidant 'veler e pales ho larda,  
Epad ma ar zoudardet, siouaz ! ho tivouada ;  
Var ann tachennou brezel dindan brassa tomder !  
— Ha d'an dud ar Prefeded 'lar eo mad an amzer !

N'euz 'met nebeut deveziou 'peuz guelet, Bretonet,  
Dre urz ar C'houarnamant skrivet gant ar Prefet,  
Ha staget tammou paper euz an oll vogeriou  
Evit lavaret deoc'h-hu n'oa ket a vrezelliou.

Perak 'ta aotrou Préfet gant ar Gouarnamant,  
He 'larit d'ar baizantet traou zo ken diskiant ?  
Anat mad eo d'an oll dud ez euz sur eur vrezel,  
Pa'z e guir emer bemdez kass soudardet pell, pell.

Allas ! ni a voar brema perak omp bet tromplet  
Gant potret ar Gouarnamant hag he oll Brefetet ;  
En eur rei deomp da gredi n'oa netra en Afrik,  
Voa c'hoant hon dije hanvet potret ar Republik.

Guir eo 'vit ar Prefetet hag ho mignonet vras  
N'euz brezel ebet hirio na ne deuz bet biskoaz ;  
Rag int a vez azezet 'barz er saliou fichet,  
Epad ve ar soudardet var dachennou lazet.

An Afrik oa gounezet d'ar Frans gant ar Roue,  
Ar Republik 'ra enghi d'hon tud koll ho bue !  
Rak-se guelit, Bretonet, penaoz an Drapo guen (1)  
A gasse var gresk atau galloud ar Fransisien.

---

(1) An Aljeri a zo bet staget euz ar Frans, dindan ren Charles

'Leac'h ar Republik fall-ma 'ra deomp koll hon danvez  
Ha d'hor bugale siouaz ! er vrezel ho buhez !  
Birviken ken n'hor bezo na peoc'h, nak urs e Frans  
Rak ar Republicanet eo a glask e goal-chans !

Hon Deputeet difeiz 'doa votet eul lezen (2)  
Da viret eus soudardet da gaout beleien ;  
Ha setu perak siouaz ! 'maint hirio o vervel  
Heb sakramant na belek, 'pell d'euz ho Breiz-Izel.

---

*X euz an hano. An Drapo guen pe ar baniel guen eo en deuz  
gounezet d'hor bro, bro an Arabet. Var dro daou villion hanter  
a dud a zo ennhi. Ar gear-benn a rer Alger anezhi, a zo daousec  
mil den a tri-ugent ho chomm ennhi.*

*Meuleudi d'ar Roueel a vouie kreski ar Frans, eleac'h ar Repu-  
blik hag ar Republikanet ne reont nemet he dispenn !*

*(2) Hor soudardet keas, ho vervel var tachennou ar vrezel, a  
c'houlen eur belek evit silaou ho c'hoession ! hag ar Republik a  
lavar dezho evel eun diaoulez ma'z eo : marvit, marvit ma  
kerit, ne pezo belek ebet ! Ia, truez eo guelec ar vugale baour-  
se ho vervel evit ho bro ebarz en eur vrezel didruetz, savet gant  
ar Republicanet fall, heb sakramant ebet, pell euz ho c'herent.  
Tri mil a zo maro dija, heb counta ar re a varvo c'hoas !*

*Sonjit, ladou ha mammou, penaoz ez euz bet kavet Deputeet  
ebarz er Finister, evit miret n'ho deffe ar zoudardet beleien !*

*Setu aman hanoiou Deputeet ar Finister ho devoa votet evit  
cass kuit beleien ar zoudardet : Arnoull, Corentin Guyho, Lois  
Hemon, Nedelec.*

*Poent eo d'ar Republik-man torri he gouzouk, rak ne ra netra  
nemet ober drouk anezhi. Ober brezel diot goude beza promettet  
ar peoc'h d'an dud, revina ar vro, goude beza promettet eur  
Gouarnamant marc'hat mad ! Evit ar baïsanter, an dud divar ar  
meaz e ia fall tre an traou. Evit teurel ar Republik hag ar  
Republicanet en traon he vezo dao voti evit tud a vezo a du gant  
Herri V !*

*Gant Herri V, gant ar Roue, ni tud divar ar meaz, ni labour-  
erien douar, hon devezo an urz vad hag ar peoc'h.*

*Gouzout a rit oll, penaoz n'euz ket pell c'hoaz, ar Prefet, e hano  
ar Gouarnamant a lavare ne oa ket brezel, na ne vije ket brezel !  
Ar Republicanet euz ho zu a lavare ar memes tra ! Rak-se guelit  
ez euz bet lavaret gevier deomp gant ar Gouarnamant, gant ar  
Brefedet, gant ar Republicanet a oa o klask beza Deputeet pe e  
vije hanvet ho mignonet ! Tromplet omp bet gant ar Gouarnamant  
hag ar Republicanet !*

Trist eo gullet eur zoudard mervel pell euz he dud,  
Ha beza fourret en douar evel al loenet mud :  
Goude m'eo bet pistiget siouaz ! 'barz er stourmad,  
N'ell muï kahout eur belek 'vit donet d'her c'hrenvaat.

Setu aze, Bretonet, ar stad meurbèt poanius,  
En em gav ho pugale gant lezennou skrijus,  
Great gant Republicanet d'enebi euz Doue,  
En eur denra ar belek, allas ! euz en arme !

Ma karje c'hui, Bretonet, pa vijec'h o voti  
Eleac'h Republikanet beza choazet mistri,  
Mistri leal ha kristen, 'dije great mad ho pro  
Hag ho miret euz brezel, hag an traou divalo.

Digassit brema : Doue ! evit ho pugale  
D'ar Frans, hor bro garet, Herri pemp evit Roue !

---

*Ar Roialistet pe ar re oa deuz tu ar Roue, a lavare deomp er  
c'hontrol dioual oc'h ar vrezel ! Mar fell deomp kaout urz ha peoc'h  
e Frans, eo red deomp klask ar Roue ! Goulennomp eta oll ma  
teuio ar Roue da ren e Frans ! Pedomp Doue evit ma kouezo ar  
Republik-man ebars er vouillen !*

*Great gant eur paisant guisket gant dillad  
glaz !*

---

## SON AN HINI GOZ



DISKAN.

An hini gos e ma dous ;  
An hini gos eo zur.

Kouscoude dont da bardonna  
'Nhini iaouank eo ar vrava !

Pa'z an d'ar foar d'ar C'hastellin  
An hini gos a bea ar guin !

Pa'z an d'ar bardonniou da bell  
An hini iaouank zo fidel.

Pa'z an d'ar foar ha d'ar marc'hat  
An hini gos am c'hundu mad.

'Hini iaouank d'euz bræentez  
Da vont d'ar foar da Vontroulez.

Kouskoude pa vo red prena  
An hini gos vo ar guella.

Brema vit monet da vragal  
'Hini iaouank zo deuz ma stal.

An hini gos renkin da gahout  
Mar fell d'in kaout kezec pe saout.

'Hini iaouank deuz bleo melen  
An hini gos deuz arc'hant guen.

An hini gos a gavan fur,  
An hini iaouank ne ket sur.

Dont d'ar foariou da Bont-'n-Abad  
'Hini iaouank zo deuz ma stad.

Ma ve red prena patatez  
An hini gos vo ma maouez.

'Hini iaouank a blij d'ime  
Vit monet d'al leuriou neve.

An hini gos a blij kals d'in'  
Dreist-oll 'balamour d'he c'hregrin.

An hini iaouank gavan koant  
Mes allas ! n'e deuz tam arc'hant !

An hini gos gavan devot  
Eun tammik re evit va fot.

'Hini iaouank gav din ive  
A gar betek re he banne.

Setu perak oun-me nec'het  
Siouaz ! d'in brema gant merc'het.

Unan 'nezho gavan kosik,  
Hag eben all ev he bannik.

An hini gos en deus arc'hant  
'Hini iaouank ev guin ardant.

Nec'het braz oun ober ma c'hoaz  
Etre bleo melen ha penn glaz.

An hini gos a gar pedi  
An hini iaouank gar mesvi.

Guelloc'h vezo d'in marteze,  
'Hini gos devot da Zoue.

Kemmer rin brema 'vit pried  
An hini gos dra m'hei ridet.

Kentoc'h 'vit kemmer mesvirez  
An hini gos vo ma mestrez.

Kea da bourmen kos plac'hik koant  
An hini gos en deuz arc'hant.

Gant n'hini gos me vevo mad  
Hervez ma zere euz ma stad.

An hini gos en deuz arc'hant  
Ha ne ev ket a vin ardant.

Ha te zo c'hoaz iaouankik tre  
Ha ev dija an hini kre.

An hini gos zo meurbet fur  
Ganthi m'em bezo plijadur.

Ha te daoust d'id beza iaouank  
Gant odivi n'em daul er fank !

Laret ran d'id gant madelez  
An hini gos vo ma mestrez.



Kemmeret 'bije vit bragal,  
Te merc'h iaouank evit dansal.

Te plac'h iaouank 'zo diskiant,  
P'avez kement a vin ardent !

Me den iaouank d'id lavaro :  
Alo plac'h iaouank kennavo !

Kennavo d'id t'a mesvierez  
An hini gos vo ma mestrez.

Va hini gos a gar Doue  
Ha me marteze rai ive.

Hervez Doue glaskimp beva  
En unvaniez ar vrassa.

Goulen a raimp ive bemnos  
Digant Doue he Varados.

An hini gos e ma dous  
An hini gos eo zur !

*Bretonet ha labourien douar, klaskomp ive evel an den iaouanc-  
se, ober hor choas etre ar Republik a voal-gass ac'hanomp, a laka  
var hor c'hein berniou taitlou ha kargou, a gass an dud ar meaz  
eus ho ziez, a zerr an ilizou, a denn ar c'hroasiou eus ar skoliou  
hag a zifenn komz eno d'hor bugale a Zoue ; klaskomp eta ober  
hor choaz etre ar Republik fall-man hag ar Roue, a lakafe  
ac'hanomp oll evurus. Gant ar Roue, gant Herri V, ni  
tud divar ar meaz a revo didrousoc'h eget gant ar Republik  
fall-man ! Arabet eo da zen ebet spounta evit klevet ar Republi-  
canet o trouk prezek euz an noblans hag ar gizou goz ! Ar Roue,  
a vezo den an oll, mignoun an oll ! Na selaouit ket ar re a  
zrouk-prezek euz ar vetein hag ar Relijion, rak ar re ze a zo  
Republicanet, ha ne glaskont nemet ho touelli hag ho lakaat da  
goll ho feiz hag ho Relijion.*

*Ar Republicanet ho devoa promettet deomp ar peoc'h hag ho  
deuz tennet var ar Frans ar brezel.*

*Ra zeui ar Roue Herri V da c'houarn ar Frans, evit gloar an  
Aotrou Doue, ha mad hag evurusdet an dud divar ar meaz !*

*Bevit Doue ! Bevit ar Roue !*

EUR GLAZIC.